

Galv d'ar c'hevredigezhioù d'ar c'humunioù

Redadeg 2014

Pelec'h 'vo al loc'hañ ? an degouezh ?

1. Temz-spered Ar Redadeg

Un darvoud breizhat eo « **Ar Redadeg a di da di** » aozet war dachenn Breizh (ar pemp departamant) bep eil bloaz. Lieslec'h eo ha desachañ a ra da genlabourat dorn-ha-dorn kement kevredigezh, kement embregerezh ha kement den a zo tomm e galon ouzh ar brezhoneg hag ouzh e implij pemdeziek.

« **Ar Redadeg a di da di** » a zo he fal talvoudekaat ar yezh, en he finvidigezh hag he liesegezh, ha kas war-raok ar brezhoneg hag an implij anezhañ .

Un dro eo an darvoud-mañ ivez evit dastum arc'hant a vo roet war-lerc'h, evit ul lodenn, da zougerien-raktres. Aozet e vo e 2014 adal ar Sadorn 24 a viz Mae betek ar Sadorn 31 a viz Mae.

Ha c'hoant ho peus e teufe Redadeg 2014 en ho korn-bro, en ho kumun ?

2. Redadeg 2008, 2010 ha 2012

E 2008 ez oa loc'het eus Naoned ha degouezhet e Karaez, e 2010 eus Roazhon da Bondi, e 2012 eus Brest da Zouarnenez. **Hag e 2014 ?** an teuliadoù a ginnigo ar muiañ a youl hag a arguzennoù a vo dibabet evit-se. (*gw.teuliad*)



3. Degemer al loc'hañ pe an degouezh

An holl frammoù (kumunioù, kevredigezhioù, strolladoù mignoned, skolioù, ...) a c'hell sevel un teuliad evit degemer loc'hañ pe degouezh Redadeg 2014. Gouestlet e vo an divizoù hervez ar c'hrafoù-mañ :

- Bez' e rank bodañ an dud al ledanañ ar gwellañ
- Bez' e rank reiñ an dorn d'ar c'helaouiñ ha d'an titouriñ a-benn dec'hervel ar Vretoned en-dro d'an darvoud-mañ, al ledanañ ar gwellañ (keleier ar gumun, kelaouiñ ar c'hevredigezhioù, ar skolioù, kazetennerien, skritelloù, emvodoù kelaouiñ, ...)
- Bez' e rank kemer perzh un niver bras a-walc'h a dud a youl-vat evit ober war-dro degemer ar Redadeg an devezh ma tremeno er gumun : surentez an hent (arouezerien, rederien, moto, ...), hentañ Ar Redadeg (panelloù, eilblenier, ...), kemer perzh en abadennoù pe standoù ma vez (un doare da lakaat ar gumun war-wel ivez) ...
- Bez' e rank kaout skoazell ar gumun evit an aozadur (kaout ul lec'h brav, dafar prestet, yalc'had, perzh an dilennidi,...)

Evit sikour hag aesaat pep kevredigezh pe kumun ha pep poent meneget a-us, ez eus bet krouet ur bodad "hentad" e-barzh kevredigezh Ar Redadeg.

Evit gouzout muioc'h pellgomzit da 06 08 64 99 72 pe 09 61 20 26 11.

4. Respont da galv Redadeg 2014

A-benn gellout aozañ mat Redadeg 2014 e c'houlennomp digant pep framm dedennet respont bremañ d'ar c'houlennaoueg en teuliad-mañ kevret. Diwar ar respontoù peurglokaet e vo kemeret e kont gant ar bodad hentad siriusted pep kinnig evit pep korn-bro. Sikouret e vo ganeomp, evel just, ar re a gemero perzh evit aozañ an darvoud.

Gortoz a reomp ho respontoù d'an diwezhatañ **a-benn ar 15 a viz Here 2012 !**

Savet e vo an hentad adalek an teuliadoù a vo kaset en-dro deomp.

Ezhomm en deus an darvoud-mañ eus ho skoazell a-benn kenderc'hel da vezañ war un dro kengred, bevet a-stroll ha gant plijadur ! Evit bezañ ar gouel dreistordinal dleet d'ar brezhoneg !

Kalon vat ha trugarez da gemer perzh e raktres Ar Redadeg

Gant hor gwellañ soñjoù

Skipailh ar Redadeg